

# B U E Z



## SANTEZ GENOVEFA A VRABANT

*Var un ton orinal*

Me o suppli compagnunes,  
Da glevet cana eur vue,  
Da Genovefa a zeo gret,  
Melezour an itronezel.

A Vrabant a oa guinidic,  
A lignes nobl a pinvidic,  
Christenes mad e voa iwe,  
Guir servijeres da Zoue.

Pa voa en he bugaleach,  
Hi a gare an hermitaj  
En eur horn a jardin e zad  
Ne met eno n'em gav e fad

He mam ous e c'honsidérie  
Eun de a c'houennas outi ;  
Penos va merc'hic hermites ?  
Ha ne deuet-hu quet d'ar pales.

Va mam, e cornic o jardin  
Me a meus eur boquet divin ;  
M'em meus eno eur melezour.  
An autre Sant Yan Badezour.

Allas ma merc'hic, emezi,  
C'houi n'en noch quet evit souffri  
Ebars en desert e zeus poan  
Ne andurfec'h quet a gredan.

Kaeroc'h eguet fourdelisen  
E voa ar plac'h ma a dra certen  
Quen a deuet du vit e foltre  
Da gass dan noblanç da velet.

Eur palatin, Siffroi, hanvet  
Hé renommé e deus clevet,  
Hag a zisquennas en Brabant  
Gant eun ekipach excellant.

Ractal vel ma oa erruet  
En ty e zad e n'em rentet  
En em bresaetas er pales,  
Saludi ar Prins hag ar Brinses.

Goude beza saludet,  
E menad n'eus goulenet  
M'en dije ar brinces yaouanc,  
Quen eguet menet da Vrabant.

He zad dont da gonsideri  
E voa avantajus ar parti  
A roas carg d'e mam neuze  
Da c'hou a gi a zimeje.

Ma merc'h prest en em preparet  
Eru zo eur Princ d'ho quellet ;  
Eur palatin a yoad buel,  
Quender gompes d'an Impalaer,

Me ne meus nemert sectec vloas  
Ha dre ze hon e yaouanc c'hoas  
Ne n'hon c'haos nemet eur buguel  
Da vont da suit an Impalaer.

Evel an eol pe arc c'hristal,  
Ech' antreas ebars er zal,  
Ar palatin zo estonet  
O consideri e guenet.

Gant henor a perseveranc  
Ech' eus dezain ar reveranc,  
He furnes hac e modesti  
A voe meurbet d'he fantais.

Mes pa voe parlantet dezi  
Var ar sujet da dimezi  
E chanchas a liou e pisach,  
Ar palatin e remerquas

N'e ouffe ben consideri  
Peguemant a velancoli  
A gonserve ar Palatin,  
Gant our caout refus diouti.

Eur mis anter eo padet  
Solenniteo an eured,  
A sonnerien, ar bal, an danç,  
Visitou bemde gant noblanç.

Siffroi c'houi oc'h eus eureuet,  
A gaérân demeus ar merc'het,  
Evit monet ganec'h d'ho ty,  
Diouallit ne defe annuie.

Birviquen ennu ne devo  
Evit queit a ma vezi beo  
Ne quet évit cavet annui  
E c'houennas da zont d'am zy.

Siffroi o vezò preparet  
Da vont da Trevez gant e bried  
A voe gant e dad recevet  
Gant cals a joa hag a respect.

Daou vlaves anter e zint bet  
Hep bea gant netra tourmantet,  
Bras e voa ar fidelite  
A voa entre an daou bried-se.

Quen a deus Abderam.  
Eun adversour bras da roue,  
Da brometti a dra certen,  
Massacri an oll gristenien.

Biscoas distrij a zoudardet,  
Evit eur vech na ve golet  
A dal Sodom a Belsade  
Betec Tour e bad e arme.

Tri uguent mil a zoudardet,  
An daouzeec mil a zragonnet,  
A voa gant Martel dirac Tour  
Ha c'hoas e c'houennas zicour.

Skriffa e eure d'ann noblanç  
An Alleman, Spagn, a Franç  
Dont da assistan Charles Martel,  
A voa general er brezel.

Siffroi, unan a re vrassan,  
A voarche iwe da gentan  
Hoc e voa dean discrifet  
Monet gant ann Allemagnet.

— 2 —

Siffroi, al lizer pa welas,  
Genovefa a gonfias  
E diegues, e oll vadou  
De gonfiant hanvet Golo.

Neuze pa oe prest e arme,  
E bartias en hano Doue  
Hac e oa gant Martel recevet  
Gant cals a joa hag a respect.

A drugare ann Eternel  
A deu a victoir gant Martel  
Abderam zo bet lazet  
En Tour hag e ell zoudardet.

Pe oe achiu ar gombat-ma  
Da velet Genovefa  
En deus digaset Siffroi  
E zimenti hanvet Lanfroi.

Itron, setu aman kelou,  
Lizeriou digant an autrou ;  
Er paquet e zeus eur pressant  
A dal eur som bras a arc'hant.

Lavaret a ra d'an itron  
Es ann autrou da Avignon  
Hs da Narbon, evit kemer  
Roue bras a Sarasinet.

Evel ma clevas quement se  
E ze c'hoas d'an arme  
E scritas buan Lanfroi  
Eur liser goel trist da Siffroi.

Chui Siffroi a zo en arme  
En danger bras ous o pue ;  
Mes o Genovefa a zo,  
En queu bras danger gant Golo

Penevert ne meus quet a c'hoant  
Prononci comzo insolant  
Me lavarfe ar proportionno  
A glev an itron gant Golo,

Golo voa eun intendant  
A voa hemde communament  
En compagnunes an itron  
En despet d'he opinion.

Tol eves papillon bian,  
Hac na ves losquet gant an tan  
An tan eus an impurete  
A zo nes calon nos a de.

Na sonjefes en devotion  
Hag em modesti an itron  
Ne laques da speret  
Da garout nep a skaro quet.

Pa vel er vad ar mechancht-ma  
Nel quet deceo ra Brinces-man,

Ar soupcon en deveus sonjet  
Laquet e calon e fried.

A ma eo guelet an impi  
O command c'hoari e dragedi  
Ember e velfet christienent,  
E oll dreitourach pen-da ben.

Eu c'heguiner a voa en ty  
A bet a voa o servichi,  
A voa karet gant an itron  
Abalamour m'oa den guirion.

Rei a eure an intendant  
D'ar c'heguiner commandamant  
Mont d'he c'hambr pa vije consquet  
Hac e laquat o c'hemeret.

Kaer a doa an daou innocent-se  
Quemer an douar hac an ev  
Da zonet eno da destou  
Eus an dreitourezou Golo.

Allas ! Allas ous ar gibet  
Mervel paour kes e vez red  
Ni a rai pinjen hon daou  
Eus an dreitourezou Golo.

Quemeret voe ar c'heguiner  
Hac on laquet prisonnier  
Genovefa a vo laquet  
Eus en eur c'hambr alc'hueset

Eno e combatte oute,  
Abalamour d'a chasteite  
Scirifa ra Golo liser  
Ha cass messenger d'ann autrou

A lavaret a voa decevet  
Gant ar c'heguiner he pried,  
Scirifa a eure a autrou  
Da laquat Dragan d'ar maro

Laquat Genovefa iye  
Er prison quen ma eruje  
Pa ve bep pemp mis en prison  
Neuze voilloutadas an itron

Hep sicour, na galou, na tan  
Hi a chanjas e mab bian  
Incontinent ma oe ganet  
E gristen e deveus gret

Gant aodh na varge diganti,  
Hac en be hanvas BENONI  
Sevel a re Golo ar brud  
Communament e touez an dud

Penos Siffroi a vo beuzet,  
O sonjal cavet e bried  
Cassa a eure eur vagueres  
Da choulen digant ar Brinces

Ma carje dont d'ho eureuji,  
E roje liberte dezi  
Ar Zantes a voe queleennet  
Gant ar Rouanes deus ar bed :

Ebars e gambr pa entreas  
Eur façad dezan a roas  
Ennes eo toll all leadlet !  
A poa da Siffroi prometet.

Ma vijes fidel, emezi,  
Pa voas laket da vestr en ty,  
Te a vije recompanset  
Pa vije eru va fried.

Erruout a ra lizerou  
E tristre d'ar guer an autrou  
Pa gleo golo a teus ar c'hont  
E za da Strasbourg d'he rencontre

Mont a ra da dy ar sorceres  
Hac a voa c'hoar d'ar vagueres  
Hac rei dezi aour hac arc'hant,  
Kement a ma vije contant.

Me m'eus eur melezour ardant  
Eme ar sorceres mechant,  
Hac arei Pa Siffroi guelet  
Ar pes n'em deo c'hoarveet

Pa oe zur demeus he affer  
E yas jaouis ebars en kaer  
Ma voe gant a c'hont recevet  
Gant cals a joa hac a respect.

Neuze a tennas a gostes  
Da chouloutan ar wirionnes,  
Var ar sujet eus e bried  
A rent e galon contristet.

Golo a lavares dean  
Ne donetit quet emezan  
Demeus e infidelite,  
A zo prejudis d'ho pue.

Ouspen e me an den mechant  
Me anave eur vreg vaillant  
A sisquezo en ho vresans  
Quement so gret en hoc'h absans

Siffroi, neuze ous e glevet,  
A so contentel e sp'ret  
Evel darn deus ar gristenien  
O tout d'a gredin sorcerien

Momet a rejont assembles,  
O daou da dy ar sorceres,  
En eun toul d'indan an douar,  
Elec'h na voa nag eol na loar.

A sorceres a allumas  
Diou c'houlaouen gaer a goar glas

— 3 —

Leiz eur bezel demeus a zour,  
Laquet dindan eur mezclour.

A ra dezan teir guelet  
Ar cheguiner gant e bried.  
Neuze ec'h ordren da Golo  
Da vont d'he laquat d'ar maro ;

Hi hac e mab Benoni,  
Ro dei ar maro a guiri,  
Golo sur demeus e affer,  
A zistroas joaus d'ar guer.

A lavaras d'he vagueres,  
Gret ar vec'h ma eus ar Brinces.  
Roet e setanc gant e tried.  
Evit ma vezdistrubet :

Hi hac e mabic Bononi.  
A varou sur em fantas  
Eur plac'h yaouane a voa en ty,  
Eur vec'h dezi ho servichi.

Touchet eus a gompasion  
A ias da gavet an iftron,  
Allas ! emezi, ma mestres,  
Gred a vech ma eus ho pues !

Deut a sefanc gant Golo  
Evit ho laquat d'ar maro  
Lavarit din ma mignoies  
Petra vo gret d'am buguel ques ?

Allas ! ma mestres emezi,  
Mervel rai quercouls a chui  
Va mignoies mar an chferet  
Grit eur plifjurad em requet ;

Digaset d'in liou a paper,  
Evit ma scrivin eur liser,  
Evit ma scrivin eur billet  
Da laret adieu d'am bried !

Pa vezd Golo o coannia  
Choui'allo monet a vita,  
Hac on dese em c'habinet ;  
Eur c'houls bennag a vo cavet.

Adieu, emezi ma pried,  
Me ia d'ar maro en ho requet ;  
Biscoas nemeus gret resistans  
Da souffri d'och obeissans.

Rei a eure un intendant  
Da zaou vevel commandamant  
En eur c'hoat donet d'ho laz,  
Ha z'gas ho zeod deza ;

Sevel a eure quen an de,  
Ha cass gantan an daou den-ze ;  
Pa voent erruet er prison,  
E voe divisquet an iftron,

E rejont dezi var e zro  
Eur gos ventillic d'ha Golo,  
Pa voant erru ebars ar plas  
Unan a den eur gontel noas

Evit lasa e Benoni  
Voa etre e divrec'h ganti.  
Ne doa lavaret guir a bet ;  
Neuze e gommansas preseg

E za d'an daoulin diraze  
D'o suplia en hanou Doue,  
He laza queret he buguel  
Ne rengeje queret diou vec'h mervel

An daou servicher gant trues  
A lesas gante o bues  
Ha gouda ho zrugarecat  
Ec'h antreas dont en eur c'hoat.

En eur rivier pa dremenas,  
Diamant Siffroi e taulas  
Da reded gant eun dour roulant  
Pa oa caus demeus e zourmant

Evi emezi n'am po quer  
En beb fecon poant o velet  
A merq se eus hon unio  
Epad on separation.

An diou nos quenta a zeo bet  
Dindan eur derven ho cosquet  
Hep souffri na poan nag ennu,  
Nemet damant d'e Benoni.

Eun drues e voa c'hlevet  
Pa en em gravas dileset  
Allas ! emezi ma buguel  
Ere vech ma o renquin mervel !

Guerc'hes Mari petra a rin !  
Ne neus mui a les em poulin  
Ne dan gantan nemet ar goad !  
Ne gav mui eur strill a les mad.

O va Doue oll buissant !  
Ho peb soign eus a innosant !  
Roit desan ar man da sebri,  
Vel ma roit d'ar malvriini.

Neuze e tisquen ar vere'hes  
Er c'hoat, da gavet ar Zantes,  
Da zigas desi eun heizeis  
A voe d'ho buguel magueres.

Quemeret o mabic christen,  
Ha deut da guichen ar feunteun ;  
Cetu ase dec'h eur heizeis  
A voe d'ho buguel magueres.

Ar bleisi, ar loenet mechant ;  
A voe dese obeissant ;

Bemde e teuent d'he enori,  
Ha da renta bizit desi.

Er c'hoad e voa eur porc hel gues,  
A deue d'he guelet bemdes  
Da durnial an douar desi,  
Da gavel queler da zebi,

Pa voa an daou via tremenet  
Eun .El a so bet d'e guelet,  
Hac a ro dei eur groas ar'hant  
Hac eur crucifix olifant.

Courach va merch na squisit quer  
Eun de anio vit delivret ;  
Prebaret eo a gurunen  
A ielo eun deves var ho penn.

Pa voa ar pemp blos tremenet  
Da wela eo en em laquat ;  
Var e daoulin dirag ar groas  
Evelen outi a gomsas ;

Penos, emesi, ma Doue !  
Hac er chis mä e chomin me !  
A na ne quer ewalach pemp blos,  
Da vezd bet ar poaniou bras !

M'am be tanet ho iliso,  
Ha ranverset ho auteriou.  
Em bijen ho color apeset  
Gant a daelo a meus scuilet

Petra ma Doue, a meus gret  
Da vezd quen abandonnet ?  
Dija a meus encouraget  
An usach am boa da besec :

Maes muian tra a hresq ma foan  
E c'heo ma buguelic bian,  
Ar crucifix dre miracl bras,  
Evelen outra gomzas ;

A me ma merc'h petra meus gret  
Da vezd ous eur groas staguet ?  
Guir eo ho mab a gresq ho poan  
Va hini n'en de quer bian.

Guedet ma Mam, Yan, Madelen,  
Rannet ho c'halon em c'hichen.  
Cetu ar santes consolet  
Gant ar woes ar Zalver ar bed ;

Ne c'houlen mui nemet poaniou.  
Hac ar c'hruella tourmangchou,  
Pa voa eun deves an Autrou  
O selet eus e paperou,

Ec'h erruas gant ar billet  
E devoa scrivet e bried,  
Ne ouffe den considerin  
E chiac'har e velancoli.

Tost e ve d'he c'halon ranna  
Pa lennas an tam paper-mâ,  
Siffroi na neus mui a repos ;  
Na ell coussent na de na nos.

Gant eur voes a lavar desa ;  
Te so eun den a c'hruela ;  
Te feus lazet ta vab ena,  
Ha Drogan ha Genovefa.

En em laquat a ra express  
Da vont d'ar chasse eun deves  
Na ma rencontras eun heizeis  
En rentras en coad ar gontes,

Er c'havern eo en em dec'hed  
A dreis quein a Zantes cuset :  
Siffroi a voa estonnet bras  
Form eur feumeulen pa velas.

Pa velas form eur feumeulen,  
Hac eun heizeis en e'chichen,  
Eur voes o lavaras desa :  
Siffroi Genovefa e homman.

Perac oc'h ase ea guis-ze,  
Er form-ze gant a loenet goë  
Me so eur vreg a Vrabant,  
A so seis vloa so en tourmant.

A seis vloa on retiret  
Gant aouen rac color ma fried  
Greg a Vrabant din laveret,  
O c'hanoch hu pe a no a ret ?

Genovefa a voant anvet  
Eur palatin voa ma fried,  
Cri vijer'r c'halon na welje,  
Tost a c'havern neb a vije.

Guelet ar Prins hac ar Brinces  
A semplet o daou assembles,  
Ha pa voant o daou dissemplet.  
Ar Prins goulent eus e bried.

Pelec'h eman a c'hrouadur  
En deus eun tad quen dinatur ?  
Siffroi, beo dre c'has Doue,  
Cetu e vagueres azes.

Incontinent pa zistroas.  
En e'chichen en eus c'havas,  
Hac eun dornad querler ganta  
Da rei d'he vamm evit leina.

Ordren a ra d'he vêvelou  
Mont d'ar guer da vit habijou,  
Hac eur c'haros equiped mad,  
Evit donet prest d'ho c'herc'hat.

Bevet ho deveus assembles  
Eur bloa gant cals a zanteles,  
Genovefa a zecedas  
Ar Prince hag e vab a chomas.

Ma ejont o daou assembles  
Da d'rement a rest ho bues  
De plas ma oa Genovefa,  
D'ober pinijen a vrassa.

Genovefa, ni o suppli  
Da gavet sonj ac'hanomp ni ;  
Troit divarnomp an teir goalenn,  
Bresel, quernes, hag ar vocen.



## A N Æ L H A G A R B U G U E L

— — —

*Var don : Me meus choaset eur vestres en escopi Treguer*

Eun de, eur rosen sauvach  
En dour en em zelle ;  
Ebars er fong e imach  
Souplamant a grene :  
Var bord an dour eur buguel  
A jomme sebeset  
O velet an ev buel  
Dre ar voas skeudennet.

« O me gar a vue !  
Emie ar buguel coant  
« An douar am gaf ive  
« D'ho fest rejouissant  
« Peger doug e en draouyen,  
« Avel fresq ar mintin !  
« Peger flour e ar spoën  
« Fleurisset é an hym ».

Neuse ar rosen sauvach  
D'am avel en repos,  
A gonte e langach,  
E lijadurio nos

Gant joas bras a receive  
Beb mintin ar glisen,  
Rayon an heol da greiz-de,  
D'an abardae prisent.

« Pa velana an alc'hueder,  
Emie an innocent,  
« O nijal ebars en èr,  
« Var zu an Oriant,  
« Ne garfen quet elvetan  
« Passeal ken lijer,  
« Re douq é ar vue-man,  
« Vit beza tremener.

Eun deillen sec'h, o kueza  
Deus eur blank anter glas,  
A lakas pront da rida  
An dour scler eus ar voas,  
Ar rosen a lavare ;  
En enni e unan !  
« Né garfen ket evelse,  
« Distaga ken buan.

« Paour kez fleuren eme an æl  
« Prest na vont d'an anvou,  
« Ar bues man zo henvel,  
« Eur ar mor a zaelou.  
Assambles gant a rosen,  
E kemer ar buguel ;  
En eur zevel e noabren  
E kan a voes huel :

« Evurus ar fleuren tener  
« Tennet dre garante,  
« Eus a dindan an domder  
« Arog anter an de,  
« Ar zeven a deu buan  
« Da vankat er vue ;  
« Evurus ar buguel bian,  
« Zo galvet ganf Doue.

FIN